



EXEMPL HA PUNITION

*Eus a eur plac'h yaouanc, pehini e
deus bet ar grueldet da laza e fêvar
C'hrouadur, condaonet da veza crou-
guet ha dévct ar guér a Roazon.*

Var eun ton nevez.

SPERET-SANTEL, m'ho ped da rêi din al lumier,
Ar c'hraç da gonposi eur Vers spirituel.
Eun exempl a zo guél drist hac eur melezour
patant,
Ma rêi reflexion varni an dud yaouanc.

Er bloavez mil seiz cant tri ha daou-uguent,
An deivet a vis du, evit rêt da entent,
En escopti a Roazon, en dreo euz a Zant-Cloda,
Ec'h êruas eur malheur a ra d'an oll crena.

—
Eur femelen yaouanc, a liguez enorabl,
Eus a dud pinvidic abers mam, abers tad,
A hanas daou vuguel; er moment e voe tentet
D'o etrangli o daou, hep beza badezet.

—
O c'heuill eur guzul fall e qemeraz eur bal,
E yas da gorn ar parq d'o flanqa en douar;
Mes Doue oll buissant en devezs bet permetet
Dre eun aneval brutal m'ê ar c'hrim anavet.

—
Retorn a ras d'ar guêr da guz he fallenti;
He zad he remerqas hac a c'houlas outi :
Va merc'h pelec'h oc'h-u bet? goal chenchet
bras ho cavàn ;
Diouz al liou a zouguit e seblant ez oc'h clan.

—
Respont a ras d'e zad gant eun êr indifferant :
Me a vezo exempl da galz a dude yaouanc ;
Va buez a verito beza partout publiet,
Ma rêt reflexion varni calz a blac'het.

—

He zad ouz e c'hlêvet a ras reflexion
Var he oll broposiou a douche e galon.
Ha possubl ve ta, va merc'h, et ven bet ouz ho
mezur,
Em be eur c'hrouadur da rêi din displijadur !

Da ben pêvar devez m'e doa grêt he zorfet,
He zad a yas d'ar parc da guerc'hat e loened ;
P'antreas voe estonet o velet eun aneval
E tenna'n daou vuguel ermès eus an douar.

Eus a zeis crouadur e deuz bet va fried,
Ne meus nemet unan oun ganti glac'haret.
Lavaret mat e voa din em bije sur calonat
Diouz va merc'h libertio, abret pe divezat.

Redec a ras d'ar guêr n'eur goler ar vrassa,
Ma gemeras eun hach en avis he laza ;
Mes pa zonjas sqêi ganti, e æl mat e inspiras
D'arrêti e goler, hac e verc'h a dec'has.

Quittât a ras an ty da vit e daou buguel,
Hac o facas o daou ebars he davancher,
Hac en em rentas gante e ty'n autrou Senechal,
Da zisclêria deân he zorfejou barbar.

An autrou p'e c'hlêvas a oe bras estonet,
A chomas ouz e dol evel eun den mantret,
Ar bluén demeus e zorn a goeas crac diganta ;
Pa vel an daou vuguel e commanç da vouela.

Penos, miserables ! ec'h eus bet ar galon,
Da laza daou vuguel hep caout compassion ?
Eur bunion güell vras ac'h eus-te meritet,
Hac a vo hep dale ec'h enep prononcet.

An autrou Senechal a gomand d'eur serjant
He laqet er prison neuze souden vatant,
E güer a demeus a Roazon ha dindan seitec devez
E voe grêt he arrêt ha jujet he froces.

Pa voe interrojet, ar justic a estone
O vèlet ar plac'h-mâ e tislêria he bue,
O velet pegüer secret e cuze he oll c'hrimou ;
Nemet puissanç Doue n'anavee anezo.

Eus a bemp crouadur a meus laqet er bed,
Nemet unan zo beo ; pêvar a meus lazet :
D'en sur n'en devez santet va oll c'hrimou
execrabl,
Nemet sur an daou-mâ en deus goezed va zad.


Ar c'henta meus e qichen qêr Vitre,
A dolis er rivier pa voe ganet gane;
Hac an eil a voa maro a ben ma teuas er bed,
A blantis er bern teil en parc va amezec.

Ha nemet an drede zo chomet en bue;
Entre Kermaria e voe ganet gane;
Er c'hassis prest d'ar porcher, hac eno e voe cavet
Gant daou zen ancien o tremen ar vêret.


Neuze voe condaonet da veza divisqet,
Laqet en he c'herc'hen eun invis roussinet,
Hac an amant enorabl a rancas ive da ober
Gant eun torch allumet dirac ilis Sant Pêr.

A dal ilis Sant Pêr bete ma voe rentet
En qichen ar potañç true e voe c'hlêvet
O ouela, o teplori, o c'houlen digant Doue,
Eus a greiz he c'halon barados d'e ene.

Cri vije ar galon em Roazon na ouelje,
O clêvet ar plac'h-man penos e prezegue;
Ha pa bignas d'ar potañç e c'houlennas an amzer
Da instrui'r yaouanqis he assiste da vervel.



REFLEXION



ENTREZOC'H, tud yaouanc qement zo o clêvet,
Comprenit er maro zo din-me preparet;
Evit va oll bue fall ha va dizoboissanç
E rançàn mervel mezus, sivoas, ous eur potanç



Me zo eur plac'h certen a voa elevel mad,
Disqet e pep fêçon gant va man ha va zad;
Demeus a zeiz crouadur int am c'harie ar muia,
Ma ra hremàn deze var o zreid dizec'ha.



O ren va unec vloas e voent-me recevet
Gant person va farres, gant enor ha respet;
Da ober va c'homunion etouez ar vugale;
Pemp bloas e meus bevet en carante Doue.



Da ben va c'hoezec vloas e vea bet debochet
Gant diou plac'h libertin hac o c'hamaradet,
Ma yèn-me bemnos ha d'ar bal ha d'an dançou ;
Va mallos a bedàn gant an nep a heuillo.

Tadou, hac'houi mamou, mestrou ha mestrezet,
Instruit ho pugale hac ho tometiqet ;
N'o lezit qet da vonet da nep seurt assemble
Na vezo tud honest en compagnunez gante.


Me zo hirio, sivoas, melezour digor franc,
Diouallit diouz ar bed, entrezoc'h plac'het yaouanq ;
Pedit Doue d'ho sicour hac e Vam sacr ar Verc'hes
Da bellât diouzoc'h ar goal compagnunez.

En em recommandi a ràn d'ho pedennou ;
Pedit Jesus dre e c'hraç d'am receo er joayou ;
Mont a rancan d'ar maro, pa e meus er meritet,
Pardon a c'houlennàn ouz qement zo o clêvet.

Quittât ràn ar bed-màn leun a dristidiguez ;
Va Jesus adorabl, ho pet onzin truez !
Mervel rin ouz eur potañ, ha va c'horf paour vo dê
Al ludu anéan gant an avel stringet.

Comprenit va'bue, entrezoc'h, bugale ;
Oboissit d'ho tud, balamour d'a Zoue,
Hac e vezo sur eun deiz oll da yea curunét
Gant Jesus en e c'hloar en pales an Drindet.

FIN



E Montroulez, e ty LANOË, ru ar Pave.